



IMBOURC'H

Kelaouenn *Emglev An Tiegezhioù* niv. 69 Genver-C'hwevrer 2011 Priz : 2,5 e

Poblachouriezh pe Europa o tiabafiñ

En e niverenn 3861 eus ar 25 a viz Du 2010, ez embanne ar sizhunieg gall *Valeurs Actuelles* ur rummad pennadoù dindan an talbenn rummadel : *L'Europe aux couleurs populistes* (Europa he livioù poblachour). Bez' ez eus ur ster un tammig dismegus gant ar gerioù "poblachour" ha "poblachouriezh", graet e vefe galv da vondougou izelañ an dud, hogen pa vez diazerc'het Europa hogos a-bezh gant ar gudenn-se, ez eo poent marteze desellout ar gudenn-se en un doare disheñvel, a dennfe kentoc'h d'ur verzhidigezh, gant muioc'h-mui a dud, emañ Europa o vont da get. Tavet e veze war ar verzhidigezh-se betek-henn en abeg d'ar *politically correct* holl-vezant, bremañ e hañval an amzer-se bezañ distremenet, da skouer gant an Alaman Thilo Sarrazin, besprezidant Bank kevreadel Alamagn, gant e levr *Deutschland schiff sich ab* (Alamagn o vont da goll). Buket e vez dreist-holl en e levr war an Durked a zo hervezañ o c'hounit Alamagn evel an Albaniz vuslimat o deus gounezet Kosovo serbat : dre ur feur genel uheloc'h eget an Alamaned. E-touez broudargadoù¹ liesseurt al levr e vez diskouezet sklaer an aon rak islamidigezh ar vro pa lavar : "Ne hetan ket lezel d'am bugale ha bugalevihan ur vro vuslimat en he rann vrasañ, emen e vo komzet turkeg pe arabeg, emen e vo douget ar ouel gant ar maouezed, emen e vo mentet an devezh gant galvadenn ar muezzin". Feuket e

voe politikerion ha tud ar meziennou - retvezh ar *politically correct* - gourzhabannoù² ha komzoù imoret a voe distaget diouzhtu ganto a-enep dezhañ, hogen tamm ha tamm e voe tavet war endalc'had al levr pa voe gouezet e oa an hanter eus an Alamaned a-du gant pezh a skrive Thilo Sarrazin.

Norvegia, bro anavezet evit he hengoun a zamantegezh³ - ul luc'hskeudenn a ziskouez ar rouanez Sonya war he loeroù, ur seurt *djellaba* en-dro dezhi, hag ur ouel islamek war he fenn, o tigorlidañ un diskouezadeg war an Islam en ur voskeenn eus Oslo - a hañval bezañ mennet da reiñ un taol herzel d'hec'h islamidigezh. Nac'het eo bet gant gouarnamant Norvegia e vefe savet ur voskeenn e Tromsø, 400 km en tu all d'ar c'helc'h arzhrodel⁴, war zigarez e vije bet arc'hantet ar savadur gant ur Saoudad pinvidik, Hamad al-Gamas : 2,5 milion euro. C'hwitet eo bet war ar raklun-se dre emell Oslo en deus arguzennet n'eus ket a frankiz relijiel en Arabia Saoudat. "Bez' hor bije gellet lavarout nann hepken, a zispleg mavdiernezh an Traoù diavaez, hogen graet hon eus hor splet eus an degouezh evit ouzhpennañ e vije bet diac'hinadek reiñ an aotre keit ha ma vo desellet evel un torfed bezañ mennet da ziazezañ ur gumuniezh kristen en Arabia Saoudat. Un

² Gourzhabann : *protestation*

³ Damantegezh : *tolérance*

⁴ arzhrodel : *arctique*

¹ Broudargad : *provocation*.

tammig a-raok, e miz Here e voe nac'het ouzh raklun ur voskeenn all, en Oslo ar wech-mañ, evit an hevelep abegoù : berzet e vez ouzh savidigezh ilizoù en Arabia Saoudat ha pennoù relijiel estreget muslimat ne c'hellont ket gwaznezhañ⁵ er vro (koulskoude ez eus 1,3 milion a Gristenion er vro, a orin estren evit an darn vuiañ). Tamm moskeenn ebet e Norvegia mar n'eus ket keveskemmed en Arabia evit ar Gristenion. Diskuliet ha tamallet eo bet ar berzidigezhioù-se abaoe pellzo gant an FrP (Strollad an Araokaat), deuet da vezañ ar pennañ strollad kaeour⁶ gant 23% eus ar mouezhioù en dilennadegoù evit ar gannaded.

En Aostria, Heinz-Christian Strache, warlerc'hiad da Jörg Haider (aet da Anaon) e penn Strollad ar Frankiz (FPÖ), en deus gounezet 27,1 % eus ar mouezhioù en dilennadurioù-kêr ha rannvro e Gwenvon⁷, kêrbenn ha Land war un dro. Ahelet en devoa e stourmad politikel war an hevelep dodennoù : harz d'an enbroidi, harz d'an Islam

En Izelvroioù e verzer an hevelep anadenn, Geert Wilders e penn "Strollad ar Frankiz" (PVV) en deus gounezet 17% eus ar mouezhioù en dilennadegoù europat. Deuet eo e strollad da vezañ an eil nerzh politikel en Izelvroioù hep bezañ krennet war e ziskleriadurioù entanus a-enep d'ar Vuslimiz. Derc'hel a ra ar gouarnamant nevez a-drugarez da skoazell ar boblachourion-se.

Pep hini ac'hanomp en deus c'hoazh en e eñvor ar poblater evit mirout e vefe savet moskeennoù gant minaredoù e Bro-Swiz, renet ha gounezet gant an UDC (Unaniezh Demokratel ar C'hreiz) gant Oskar Freysinger en he fenn. Eno ivez e voe an hevelep tud feuket dre Europa a-bezh ha gourzhabannoù distaget a-enep d'ar Swiziz, war zigarez e vije bet gwallet Gwirioù Mab-Den ganto. N'eo ket chomet Oskar Freysinger hag an UDC kousket war o lore, aet int a-nevez er stourm evit goulenn ma vefe skarzhet kuit an dorfedourion estren, niverus-niverusañ abaoe digoridigezh bevennoù Bro-Swiz d'an tachad Schengen. Mard eus un emglev gant bro an torfedour e spurjo e gosp⁸ en e vro, mar n'eus ket dioutañ e vo skarzhet eus ar vro e dibenn e gosp en ur prizon swizat. D'an 28 a viz Du 2010 e oa ar vouezhiadeg, ha 52,9 %

⁵ gwaznezhañ : officier.

⁶ Strollad kaeour : parti d'opposition.

⁷ Gwenvon : Vienne ; diouzh e anv keltiek orin : Vindo Bona (diazeg gwenn).

⁸ Kosp : kastiz.

eus ar Swiziz a zo bet a du gant ar mennozh-se. Gourzhabannoù ez eus bet c'hoazh hogen war un derez izeloc'h, komprenet eo bet marteze e felle d'ar Swiziz chom mistri en o bro.

Traoù heñvel ez eus ivez e Sweden ha Danmark, daoust ma n'eo ket ken skogus an devoùdoù. Gant ur Strollad demokrat swedat (5,7 % eus ar mouezhioù hag 20 kannad er Parlamant), e vez ahelet e stourmad politikel war an enbroerezh hag an torfederezh. Gant ar Strollad Poblek Danat, trede nerzh politikel ar vro, e vez degaset gantañ e skoazell d'ar gouarnamantoù. Dindan e levezon ez eus bet sevenet al lezennoù strishañ en Europa war an enbroerezh. Da skouer ez eo difennet dimeziñ d'un estren a-raok e 24 bloaz. En Italia, "Lega Nord" Umberto Bossi – a oa kevreet gant strollad Berlusconi er gouarnamant -, en tu all d'he stourm evit dizalc'hded Padania, a stourm ivez a-enep an enbroerezh. Ent diac'hinadek evit ur strollad savet evit difenn an Norzh, ez eo aet ar maout gantañ en dilennadegoù kêrel e Lampedusa e Linosa, kumun ar muiañ e kreisteiz Italia, hag ar muiañ engwalle⁹ ivez ouzh dilestradurioù an enbroidi dirgel¹⁰.

Ar Gall Pierre Manent, rener studioù en EHESS (e galleg : *Skol ar studioù uhel evit ar skiantoù kevredigezhel*) e kerzh un dazaters¹¹ gant ar mizieg *Le Spectacle du Monde*, miz Kerzu 2010, a-zivout e levr *Les Métamorphoses de la Cité*, e ti Flamarion, a lavar : "*Souezhet-bras e vezan gant morvitell an Europiz a hañval asantiñ d'o steuziadur dezho o-unan. Gwashoc'h c'hoazh, deveizet e vez ar steuziadur-se ganto evel ar brouenn eus o dreistelezh divezel*". [...] *E-pad bloavezhioù eo bet kredet gant Europa e c'helle en em lezel da riklañ goustadik en un doare teuzadur en un denelezh he dije trec'het war an holl ziforc'hioù. Ac'hanta, ne zaleo ket mui da zihuniñ*". [...] *An aon rak an tabut en deus graet e veze gwelet fall-tre kement evezhiadenn war ar c'hrafadur-se (hini an Islam). Pedet ez omp da chom hep gwelout an heuliadurioù politikel pe speredel savet diwar bezañs milionoù a Vuslimiz en hon touez. Kerzhit ! Grit evel pa ne c'hoarvezfe netra.*" Ar milionoù a zilennerion deduet gant ar boblachouriezh ne welont mui an traoù evel-se ha ne dermont mui da reiñ lamm d'an hudverzoù¹². Evezhiek da

⁹ Engwalle : exposé.

¹⁰ Dirgel : clandestin.

¹¹ Dazaters : interview, entretien.

¹² Hudverz : tabou.

gompren an dialusk¹³-se a-berzh ar C'hornog e-tal gwask an Islam en Europa, e c'houzav Pierre Manent ac'hanomp : “*Keal a vez amañ eus brasañ treuzfurmader solwez¹⁴ Europa abaoe kantvedoù*”.

Darsav¹⁵ ar Rouzeganed

Evit komz un tammig gant gerioù Yann Gouer e lavarfen a-walc'h ez eo ar vezañs-se ag an Islam en Europa da geñveriañ gant c'hoari an iskis a labous a zo ar goukoug. Gouzout a rit petore labous eo ? Mont a ra da zozviñ e barzh neizh evned all bihanoc'h egeti evel ar rouzeganed da

¹³ Dialusk : *dynamique*.

¹⁴ Solwez : *substance*.

¹⁵ Darsav : *révolte*.

skouer. Lemel a ra ur vi dozvet gant ar rouzezan hag e laka en e lec'h unan dezhi, diouzh an hevelep liv. Pa vez digloret ar vioù, e kresk buanoc'h ar goukoug vihan hag e taol er-maez an neizh ar rouzeganed bihan, bihanoc'h egeti. Ar gerent, ha n'o deus ket komprenet pezh a c'hoarvez, a labour a-lazh-korf, diouzh ar beure betek an noz, evit boueta o iskis a grouadurig, dek gwech tevoc'h egeto. Evel ar rouzeganed eo bet an Europiz betek-henn, dalc'het ma oant gant ar *politically correct*, an dec'hervel da Wirioù Mab-Den, ha zoken gant ur garitez kristen dihentet. Bremañ ez eus Europiz ha ne fell ket mui dezho c'hoari roll ar rouzeganed, setu ! Darsav ar Rouzeganed ez eo !

Donwal Gwenvenez

An Islam, al laikouriezh c'hall hag an Emsav

Abaoe pell e lenner e-barzh “*Kannadig Imbourc'h*” keleier diwar-benn kudenn an Islam. Mut e chom ar peurrest eus ar wask vrezhonek war an dra-se. Gwir eo n'eus ket kement-se a Vuzulmiz war douar Breizh e-keñver Bro C'hall. Emichañs ivez ez eo nec'het meur a hini rak ne ouzont ket re vat peseurt emzalc'h kaout dirak emled an Islam. Klask a raimp eta peseurt kentel¹⁶ a c'heller tennañ eus an enkadenn, pa weler mui-ouzh-mui e Frañs ur Stad laikour, a-enep kristen ent-anat, dic'houest da zont a-benn eus an Islam daoust m'eo deuet mat a-benn da ziskar levezon an Iliz war he ziriad.

Perak e vez lidet Gouel Nedeleg en holl skolioù ?

Moarvat ez eo enket Emsav ar brezhoneg, evel an darn vras eus ar gevredigezh e Frañs, gant pennaennoù a zeu eus filozofed “*ar Sklêrijennoù*”, evel da skouer pennaennoù “*al Librentez*” hag “*al laikelezh*”. Bevañ a ra ar Vuzulmaned en ur republik laik : penaos 'ta e c'hellfed mirout da zougen ur ouel ouzh an dud a fell dezho ? Ha perak e vije ret debriñ pesked er skolioù d'ar gwener ? Ha perak e redier an holl vugale da lidañ Gouel Nedeleg er skolioù ? Ha perak ez eo berzhet galvoù ar muezzin pa glever kleier an ilizoù o seniñ teir gwech an Anjelus, bemdez-doue ?

¹⁶ Skrivet em eus ar pennad-mañ da heul ur brezegenn bet distaget dirak ar *Centre Charlier* gant Yves Daoudal.

Gwir goulennoù ez eo, hogen gwelout a reer mat diouzhtu e talvezont dreist-holl e vije ret plegañ adarre da zigristenaat un tamm muioc'h c'hoazh ar gevredigezh a-benn sentiñ ouzh pennaennoù sakr republik ar C'hallaoued, ur gevredigezh hag a zo pell da vezañ kristen daoust d'an arouezioù-se, a chom er gevredigezh evel dismantrou ur gevredigezh a zo bet.

Ha d'ar gwir goulennoù-se, n'eo ket gouest ar republik da respont dezho, nemet adskoulmañ a rafe gant marevezh reuziekañ ar “*Spont Bras*”, e-pad an Dispac'h Gall, pa glasked digristenaat ar gevredigezh betek lemel an deziadur kristen, ar sul ha seizh devezh ar sizhun.

Bro-C'hall, bro an damantegezh, bro ar frankiz

En un hent dall emañ ar Republik. Ne oar ket penaos enebañ ouzh goulennoù an Islamourion. N'he deus abeg ebet da enebañ outo. Er c'hontrol : en anv ar “*frankiz relijiel*” en em harp an Islam ouzh ar Republik C'hall evit en em ledañ bemdez un tammig muioc'h. Klevout a reomp anezho o tiskleriañ gant gwir abeg “N'eo ket posubl d'ur vro evel Bro-C'hall, mamm-vro “*Gwirioù Mab-den*”, bro an damantegezh, bro ar frankiz, nann, n'eo ket posubl ez embannfe ul lezenn da waskañ ar Vuzulmaned”.

Mat eo merzout, diwar dremen, pegen souezhus eo seurt arguzennerezh a-berzh ar Vuzulmaned pa ouzer a hent-all ne ra morse an Islam anv eus “*Gwirioù Mab-Den*”, nag eus al laikelezh, e doare ebet. Evitañ, a-fed “damantegezh”, n'eus

nemet an “dhimmouriezh”. Disoñjal a ra ar republikanourion c’hall hag an emsaverion a ya d’o heul, emañ amañ an Islam war un douar-brezel, un douar da c’hounid, oc’h ober an “*Djihad*”, ar brezel sakr, hag er brezel-se ez eo aotreet pep tra : an “*takyya*”, da skouer (livañ gevier), ha... kemer armoù an enebourion evit o zreiñ a-enep dezho. Pezh a reont gant plijadur vras.

Ha kement-se-holl gant skoazell nerzhioù-gourzhtreiñ entiriadel¹⁷ o deus kanet ar ganaouenn anavezet, atav an hevelep kanaouenn : “*Lezit-i d’ober evel ma karont*”. Evel evit an diforc’hañ-bugale “*Hol lezit libr da gaout ur bugel, pe get*”. Ar memes argerzh ez eo “*Hol lezit da zougen ur ouel, pe get*”. Ar memes tra eo : diouzh un tu ez eus ar c’hoant da gaout ar gwir da lazhañ bugale e kof o mamm, ha diouzh an tu all ar gwir d’ar striventualegezh¹⁸ evit an islamourion. Heñvel eo bepred hentoù ar c’hourzbelloniezh¹⁹.

Tu a vefe da lavarout d’ar Vuzulmaned ez eo gwir natur an Dispac’h Gall bezañ enep-relijiel, peogwir e voe an hini kentañ o verzañ gouelioù : re al leanezed. N’eo ket war an Damantegezh²⁰ an hini e voe diazezet an Dispac’h Gall, war ar brezel a-enep ar relijion ne lavaran ket. Seurt arguzennerezh n’o dizhe ket. N’o deus netra da ober gant devoudelezh enep-relijiel “*Disklêriadur Gwirioù Mab-den*” dre ma servij dezho hepken da lorbiñ ar re a gred enno. Ouzhpenn-se n’int ket drouklaouen o welout ez eo enep-katolik al laikouriezh-se. Ar c’hontrol-bev ez eo, un degouezh dispar ez eo evito e talvezfe dezho al laikouriezh evit daou dra : neptuegezh relijiel ar Republik hag ouzhpenn-se un arm a-enep ar Gristeniezh ! Un neptuegezh a ro ar gwir d’an holl relijionoù d’en em ziskouez, hag a heskin e gwirionez ar Gristeniezh, sed aze un dra n’emañ ket evit displijout ! Tariq Ramadan a zispleg da skouer n’eus netra a-enep ar ouel islamek e lezenn 1905.

Pa wel ar Republik stourmerion islamek o komz eus laikouriezh, eus Gwirioù Mab-den, eus ar banniel triliv, eus ar *Marseillaise*, en em gav divarrek da zisplegañ sklaer hag anat perak ne c’hellfe ket o merc’hed en em wiskañ hervez o c’hredennoù relijiel, paz eo skrivet en ur pennad eus “*Disklêriadur Gwirioù Mab-den*” 1948 :

¹⁷ Nerzhioù gourzhtreiñ entiriadel : *des forces subversives autochtones*.

¹⁸ Striventualegezh (gourel) : *prosélytisme*.

¹⁹ Gourzbelloniezh (benel) : *subversion, guerre de subversion*.

²⁰ Damantegezh (benel) : *tolérance*.

“*Pep den en deus gwir da gaout ar frankiz da soñjal, a goustiañs hag a relijion*”.

Brezhoneg ha gouel islamek, hevelep stourm ?

Gwechall e oa difennet komz brezhoneg er skol. Bugale Breizh-izel n’o devoa ket ar gwir da gomz o yezh-vamm, zoken e porzh ar skol, anez bezañ kastizet ha mezhekaet. Evel-se ez eo bet diwriziennet ar brezhoneg. Heñvel eo evit al laikourion pa vez anv eus ar ouel islamek : ret eo he berzañ. An holl vugale a ya d’ar skol a rank bezañ holl heñvel, hep relijion, hep merk sevenadurel ebet nemet hini ar Republik. Bugale a rank tremen, an holl anezho, dre voul nemetañ ar Republik, evit dont da vezañ keodedourion kevamsavadus²¹. Keodedourion kevatal ar Republik unan ha dizisrannadus.

“*Holl vugale Frañs a zo mibion ha merc’hed ar Republik*”, a zisklerias Jacques Chirac da vare al lezenn war ar ouel islamek. Ur wech all en doa lavaret ne oa ket a lezenn uheloc’h eget al lezenn republikan. Kement-se holl a zo bommoù heverk eus ar gualiadurezh republikan c’hall...

Sevel a ran klemm.

Sevel a ran klemm. N’on ket ur mab dizanv eus ar Republik dizanv. Mab va zud ez on-me. Roet o deus din ar vuhez hag un anv. Graet o deus ac’hanon hêrezhour ar sevenadurezh ma kemerent perzh enni. Mab d’an Iliz ez on ivez, hag e ro din ar vuhez peurbadus. Ar Republik n’he deus ket roet din ar vuhez. N’eo ket va mamm enta. N’eo netra evidon.

A bep tu e klever emañ ar Republik en arvar. Evel da vare Valmy, e 1792. Ret eo difenn “*Talvoudoù ar Republik*” a lavarar dimp, tra ma tiskleir an dud arallvro ne c’hellfe ket seurt tabuterezh bleuniañ er-maez eus tiriad ar Republik C’hall.

Distroomp eta da vare an Dispac’h Gall, rak d’ar mare-hont eo eo bet eilpenet an traoù. Betek neuze e veve an dud e stern kumuniezhioù : kumuniezh an tiegezh, kumuniezh ar barrez, kumuniezh ar vicher, kumuniezh ar rannvro, hag all... Neuze ez embannas an Dispac’h eo ganet an holl dud dieub ha par en o dellezegezh hag o gwirioù, hag ez eo al lezenn *eztaoladur “ar volontez jeneral”*²². Ha c’hoazh : e teu pep

²¹ Kevamsavadus : *interchangeable*.

²² Bolontez jeneral : penaos treiñ ar mennozhiaed-mañ en ur brezhoneg ‘prop’ ? Un dro-lavar dinoaz eo da welout hogen n’ouzer ket petra ez eo e gwirionez. ‘Youl an holl’ n’eo ket, na zoken, alies mat, youl an darn vuiañ eus an dud. Diaes eo din

aotrouniezh, dre natur, eus an “*Nasion*”, da lavarout eo eus strollezh ar geodedourion gevatal.

kompen penaos ez eur deuet a-benn da lorbiñ kement a dud gant seurt brizh-yezh !

Da lavarout eo e teu an dud er bed hep tiegezh : mibion d’ar Republik ez int, evel ma lavare Chirac. Ha n’eus lezenn ebet dreist da hini ar geodedourion, aotrouniezh ebet diazezet war an natur pe war an hengoun. Hini ebet.

Da vezañ kendalc’het **Yann Maneguen**

A-zivout ar brezhoneg a-vremañ

War « Dazont Breizh/L’Avenir de la Bretagne » niverenn 491, miz Du/ Kerzu, ez eus bet c’hoazh tabutoù ha pismigerezh a-zivout ar brezhoneg a-vremañ hag e vez embannet ur c’halvadenn a-berzh ur “*Skipad ar brezhoneg gwirion*” war ar bajenn 3. Fall-put e vefe ar brezhoneg-se a-vremañ kelennet er skolioù, e-keñver ur brezhoneg-pobl a vefe peurvut, hogen, ne c’hellan ket mirout ouzhin a soñjal : dre forzh bezañ war steuziañ e pep lec’h e Breizh, e teuo da vezañ gwengelek²³ ar brezhoneg-se.

N’ouzon ket penaos emañ dres kelennerzh ar brezhoneg gant ar skolioù Diwan na gant ar skolioù divyezhek, en abeg d’am chomlec’h e Blaen e-lec’h ne vez ket kelennet brezhoneg, neuze n’em eus war an divoud-se nemet keleier a eil dorn digant tud a zo-int e darempred gant ar reizhiad-skoliata-se, ha douetañs em eus un tammig memestra.

Er sizhun dremenet e oan o lenn ur pennad en ur sizhunieg gallek a-zivout “*diazalc’h*²⁴ an dud oadet-tre”, hag e soñjen e veze dalc’het memestra ar brezhoneg gant an dud kozh-se peogwir e vevont bremañ koshoc’h eget o diaraokidi, hogen un touell nemetken ez eo, rak an darn vrasañ eus an dud kozh-se ne vevont mui en o zi, en o c’hêriadenn war ar maez, tost ouzh bugale ha bugale vihan. Nann, emaint en un ti evit an emdennidi ; bez’ e c’hellont komz brezhoneg etrezo, tud kozh evelto, met setu holl, ne dreuzkasont mui netra. Torret eo bet al liamm sokial a eree ar rummadoù etrezo er c’humuniezhoù plouezel a oa bev-tre c’hoazh e kreiz an ugentvet kantved. Echu eo bremañ gant ar stuzegezh henvoazel-se bet anavezhet gant ar rummadoù kent : ur c’hant bennak a dud, pe muioc’h a-wechoù, a bep oad hag a bep yezh-vicher, o vevañ en ur gêriadenn, pep hini oc’h anavezout an holl, o kaout darempredoù pemdeziek etrezo, hag a c’helle brezhonegañ en

o aes hep bezañ rediet zoken da zistagañ ger gallek ebet²⁵.

An diforc’h etre brezhoneg ha galleg

Yezh ur gevredigezh arbennik ez eo chomet ar brezhoneg e-pad pell, tamm ebet hini ur Stad, da lavarout eo e oa hini ur gevredigezh ploueziadel ; ha diorreet a-walc’h e oa ar yezh-se e doare da spirañ evit buhez pemdeziek ar gevredigezh-se. N’he devoa ket ezhomm d’an ampoent da sevel un toullad gerioù skiantel, kalvezel, mezegel, melestradurel, prederouriezhel, ha me oar-me... ha n’o dije servijet dezhi e doare ebet.

En enep, er c’heit-se, e veze ar galleg yezh ur Stad hag unan kreñv, yezh ar rouinellerezh en Europa zoken, ma vez ar C’hallaoued lorc’h enno c’hoazh hiziv gant-se. Amzer en devoa bet ar galleg, a-hed ar c’hantvedoù, da c’hovelian an holl c’herioù en devoa ezhomm evit ur gevredigezh war ziorren dizehan. Setu an diforc’h etre brezhoneg ha galleg. Ne oa ket ur brezhoneg eus ar maezioù hag ur brezhoneg eus ar c’hêrioù, evel maz eo bet gant ar galleg ; ne oa nemet brezhoneg ar maezioù, met rannyezhekaet hervez ar broioù. Steuziet he deus ar gevredigezh hengounel-se m’en em harpe ar brezhoneg warni, ha dre heulret e vez lakaet ar yezh en arvar da vont da goll war-un-dro ivez.

Hogen, Brezhoned emskiantek o devoa tresantet, hogos ur c’hantved ’zo bremañ, pezh a zlee c’hoarvezout ha prientet o deus, gant skol Walarn da skouer ; ar brezhoneg ha ne oa nemet ploueziat, da vezañ yezh ar gevredigezh vreizhat en he fezh, hag a zlee dont da vezañ muioc’h-mui kêrel ha nebeutoc’h-nebeutañ ploueziadel. Evit tizhout ar pal-se e oa ret sevel an toullad gerioù nevez a vanke. Hag ez eo aze pezh ne blij ket da dud “*Skipad ar brezhoneg gwirion*” er

²³ Gwengelek : *mythique*.

²⁴ Diazalc’h : *dépendance*.

²⁵ Anavezhet am eus an dra-se gant ar galloweg, er gêriadenn emen on bet ganet ; kouerion e oa an holl, gant un nebeut devezhourion ha koadourion, ur gov hag ur c’harrer, an holl o gallowegañ. Pa c’hoarveze gant unan bennak klask komz galleg e veze goapaet gant ar re all. Merzet e veze se evel un dismeg diouzh e berzh e-keñver kumuniezh ar gêriadenn.

brezhoneg a-vremañ, n'eo mui brezhoneg o zadoù-kozh : “*sammet a nevezc'herioù barbar o trevezañ ar galleg*”.

Ya, a-wechoù ez eus bet goveliet gerioù diheson a vo amsavet buan, forzh penaos, gant gerioù azasoc'h. Nevez 'zo e lennen en ur pennad brezhonek ar ger gallek “*kine*”. Ne oa ket bet troet ar ger gant aozer ar pennad. Soñjet em eus : setu ur ger a vefe mat d'an dud kozh anavezout e stumm brezhonek, rak muioc'h eget ar re all o deus ezhomm anezhañ. Jil Ewan (Doue d'e bardono) en devoa kinniget “*fiñvarouelier*”, diouzh “*fiñv*” (mouvement) + “*arouel*” (soin). Treuztreset eo diwar ar galleg “*kinésithérapeute*”, ya, hogen savet eo ar ger galleg diwar ar gresianeg : “*kinêsis*” (fiñv) + “*therapeutês*” (mezeg, an hini a arouel, a ra war-dro). Pehini eus an daou c'her eo an hini ar muiañ barbar ? Kavet ez eus bet un diskoulm gant ar C'hallaoued : berraet o deus ar ger en ur virout div silabenn hepken : “*kiné*”. Daoust ha plijout a rafe deoc'h e vefe fritet evidomp nemet restachoù keginerezh yezhadurel ar C'hallaoued : “*ar c'hine, ar gineed, ur c'hine, kineed*”, ha mard eo ur vaouez : “*kineez*”, evidon ne ra ket. Rebechet e vez d'an nevezvrezhonegerion-se dianavezout an troioù-lavar brezhonek hag heuliañ re alies re ar galleg. Gant gwir abeg e vez rebechet an dra-se, hogen gwech ebet ne glevan rebechoù a-enep d'ar gerioù gallek niverus a vez ensilet er brezhoneg, aotreet eo an dra-se, war pezh a hañval. Koulskoude ez int ur begozh ken noazus hag an troioù-lavar treuztreset diwar ar galleg evit kevander²⁶ ar yezh.

N'eo ket gant tud ar werin p'edo c'hoazh unyezh eo bet degaset ar gerioù gallek-se, gant ar vourc'hizion vihan a ouie galleg ha brezhoneg; ha tamm ha tamm muioc'h ar galleg eget ar brezhoneg, ne lavaran ket. Disheñvel eo ereadurezh ar brezhoneg diouzh hini ar galleg, gant muioc'h a araogenoù ha ne vezont ket er galleg : “*kejañ gant*”, “*sellout ouzh*”, “*komz ouzh*”, “*kregiñ da ober gant*”, setu perak e kaver er c'hanaouennoù-pobl kement ha “*rankontret*” ha “*komañset*”, ha “*avañset*”, “*avañsetoc'h*”, bet degaset gant tud a oa boas da gomz muioc'h galleg eget brezhoneg. Pinvidikmor eo ar brezhoneg e keñver gerioù 'zo, met a-wechoù ez eo displetus bezañ re binvidik.

Kemeromp ar ger “*biskoazh*” : ne rank bezañ arveret nemet evit an tremened, evit an amzer da

zont ez eus “*biken*”, “*birviken*”, er mod neptu ez eus “*nepred*”, “*gwech ebet*”, “*tro ebet*”, “*kammed*” hag ar ger “*morse*”, o tont moarvat diouzh ar galloweg “*morsê*” (tamm). Ac'hanta, gant an holl c'herioù-se ne oa ket a-walc'h, ouzhpennet eo bet ar ger gallek “*jamais*” (skrivet “*james*”), moarvat gant divyezherion a gave dezho e oa re gemplezh ar brezhoneg a-wechoù, pa oa e galleg ur ger hepken evel “*jamais*”, mat e pep degouezh. Perak implijout “*partout*” p'hon eus “*e pep lec'h*”, “*e pep tu*”, “*dre-holl*” ; perak degemer “*parfet*”, “*parfeted*”, p'hon eus “*peurvat*”, “*peurwell*”, “*peurwellded*” ; “*surtout*” p'hon eus “*dreist-holl*”, “*dreist pep tra*”, “*peurgetket*”, “*pergen*” ; “*avantur*” p'hon eus “*brokadenn*”. Bez' e c'hellfed liesaat ar skouerioù.

Kudenn ar pouez-mouezh

“*Un dibunadeg dibouezmouezh eo ar brezhoneg a glever e lod klasoù*” a verz galvadenn “*Skipad ar brezhoneg gwirion*”. N'eo ket souezhus an dra-se, adalek o zri bloaz e vez fiziet ar vugale er skol c'hall, goude-se e vez ar skol kentañ derez, ar skolaj, al lise, ar skol-veur, ha kement-se e galleg ; da vare an dihuedoù e sellont ouzh ar skinwel gall. N'eo ket an nebeut abadennoù brezhonek a c'hellfe o lakaat da adkavout ar pouez-mouezh brezhonek hengounel.

Gwitibunane²⁷ eo koll ar pouezh-mouezh gant donedigezh ar skingomz ha dreist-holl ar skinwel gall e pep ti, skoazellet gant diempradur ar c'humuniezhoù henvoazel, o koll o izili e gounit ar c'hêrioù, e-lec'h e vez komzet ur galleg standard. N'eo ket souezhus e vefe taget skolidi Diwan gant an anadenn-se, evel m'en deus skrivet meur a wech T. Gwilhmod en e bennadoù-skrid. Alies ne vez brezhoneg nemet er c'hlas, rak war borzh-c'hoari ar skol e vez klevet alies muioc'h a c'halleg eget a vrezhoneg. Ha pa vezont en ti gant o c'herent, mar n'eo ket ar re-se brezhonegerion emyoulek, e vez trec'h c'hoazh ar galleg. Start kenañ eo d'an dud derc'hel un tiegezh brezhoneger en ur metou deuet da vezañ galleger penn-da-benn, anez dezho bevañ en ur grogen, troc'het penn-da-benn diouzh ar re-all. Un afer a stourmer eo deuet ar brezhoneg, ha pa vez deuet a-benn ar gerent da sevel un tiegezh brezhoneger n'int ket sur e trebado frouezh o stourm : ur bugel o timeziñ gant unan bennak galleger hepken hag e vo echu, peurliesañ, gant ar brezhoneg desket, ha ne gontan ket ar vugale o vont da labourat

²⁶ Kevander : *intégréité*.

²⁷ Gwitibunane : *généralisé*.

pell diouzh Breizh, er-maez ar C'hwec'hkogn zoken, dre ma n'o deus ket desket ur vicher oc'h aotren dezho labourat e Breizh.

A-benn ar fin, hevelep tabut, hevelep rendael, etre ar brezhoneg a-vremañ hag unan all a vefe ar brezhoneg gwirion, a hañvalo buan bezañ mibilius a-grenn, dre ziouer a emgannerion : niver ar vrezhonegerion o tigrskiñ didrugar bep bloaz. Ur Stad vreizhat dieub hepken he dije gallet saveteiñ, evit gwir, ar brezhoneg, ober dioutañ ur yezh-stad. Mar c'hoarvez hiziv d'ar Republik C'hall leuskel un nebeut bruzun evit ar yezhoù-rannvro e oar ervat n'eus mui riskl ebet

evit ar galleg. Emañ ar gevredigezh m'en em harpe ar yezhoù-se warni oc'h ober he zalaroù e pep lec'h. Evel-se e c'hell ar Republikaned c'hall, ober van da zougen bri, ez-kefridiel, d'hor strivoù-ni evit derc'hel bev ar brezhoneg, hogen war un dro e hetont sur-mat ne vint nemet arouelioù-diboaniañ²⁸ evit ur c'hlañvour toc'hor. Ne vez ket tennet ket war un arouelkarr²⁹, anavezet mat eo an dra-se.

Yann MIKAEL

²⁸ Arouelioù-diboaniañ : *soins palliatifs*.

²⁹ Arouelkarr : *ambulance*.

Pennoù

Ar gomunourion, evel an diaoul, a zo kalz dañjerusoc'h d'o mignoned eget d'o enebourion. Stalin pe Mao o deus lazhet drezo o-unan muioc'h a gomunourion eget an holl c'houarnamantoù dehouat lakaet a-gevret, hag e neblec'h en Amerika Latinegour n'eus bet fuzuilhet kement a zispac'herion eus an tu kleiz evel e Kouba : diouzh harozed kozh ar Sierra Maestra ne chom mui koulz lavaret nemet Fidel hag e vreurig Raúl.

Anavezet a-walc'h eo ar fed-se, padal ne zastumer ket alies diwarnañ an evezhiadenn anat-mañ : klask sioulaat ar baran komunour gant flouradennoù, meuleudi pe tarwazerezh a zo kalz dañjerusoc'h eget stourm outañ a-zevri. Henn touiñ a c'hellan deoc'h, tudoù : me, an hini ne van ket un devezh hep tufal war idolennoù an tu kleiz, am eus kalz muioc'h a chañsoù da chom bev pa zeufe ar gomunourion d'ar galloud eget an holl re a glask dibochañ anezho gant mousc'hoarzhoù pilpous, profoù ha pokoù laeret. Spont ha kasoni a vag ar gomunourion ouzhin ; ouzh ar re-all-se avat n'o deus nemet fae - fae ur gwaller o soñjal dija pegen kaer e vo gwelet kelan e breizh taolet d'ar guped.

E kement-se e soñjan o welet an diforc'h etre ar brud jentil o deus kelaouennerion kleizat Brazil en o bro, hag ar yudadenoù a gasoni ouzh ar "stlenn bourc'hiz" bet distaget ganto en Emvod-Kelaouennerion-Suamerikan-ha-karibanad e Havana, dalc'het eus an 8 d'ar 11 a viz Here ha talbennet "Ur stlenn nevez". Yudadenoù kasonius heuliet gant touadennoù-lazhañ ha raktresoù resis ha mall o c'has da benn, a wallsouezho a-greiz-holl ar greanter laouen-

gantañ-e-unan a zo lorc'h ennañ bezañ doñvaet e gomunourion gant chekennoù, flouradennoù ha briekadennoù.

Kazetennerion eus 29 bro (Brazil en o zouez) o deus kemeret perzh en emvod-se, a zo ivez evit prientiñ gant Forom Bedel an Deskadurezh, goubannet evit ar bloaz a zeu e kreisteiz ar Rio Grande. An emvod en deus resevet harp maerdi Porto Alegre, hag enoret e voe dre ur brezegenn gant Fidel Castro - ma talc'hit soñj, e-pad gweladenn diwezhañ Fidel Castro e Brazil e oa deredet holl vourc'hizion ar c'hornad d'en em frotañ outañ ken e oa ur vezh da welout.

E-touez an holl gealioù bet displeget gant an emvod (bet embannet er gelaouenn c'hiliat *El Siglo*, niverenn ar 26 a viz Here) tri o deus sachet ma evezh : Kentañ poent : stlenn Amerika Latinegour n'eo ket "a-live gant stourm ar bobl er vro".

N'eo ket a-live? Nag an holl gourc'hwelioù aloubet, nag an holl bajennadoù gouestlet da zivruderezh direspont an enepkomunourion, nag an holl labour adstummañ ar c'heriaoueg hervez an dogmennoù *politically correct*, nag an argad yoc'hel d'an divez kristen hengounel, nag an holl kuzherezh keleier a c'hallfe parraat ouzh azginivelezh ar gomunouriezh, na bihanadur gorrek ha dieiltro ar plas lezet d'an holl dehouiz a ya pelloc'h eget rebechoù armerzhel ha dizrouk, nag an holl azeulerezh e-keñver an arzourion ha kefredourion stourmataer ? Kement-se holl (da lavaret eo, ar beurunvaniezh evel meizet gant Gramsci, a-benn-ar-fin) n'eo ket a-walc'h. Muioc'h a vez goulennet gant ar

gomunourion. Petra muioc'h ? Gwelomp an eilvet kraf.

Da eil : ret eo "terriñ ar sparlad titouroù graet gant ar rouedadoù-stlenn bras a-fed ar gouarnamant koubanat", evit kas da benn "*la batalla de la verdad contra la mentira*", evel m'eo bet diverret gant Fidel Castro.

E Brazil atav, ar sparlad nemetañ a zo war ar c'heleier a-enep da c'houarnamant Kouba.

Abaoe 30 vloaz ne welan meneg ebet e kazetennoù Brazil a-zivout ar brizonidi bolitikel e Havana, a-zivout an armoù bevoniel-mikrobel diorreet el labouradeg *La Fabricueta*, a-zivout an darempredoù etre gouarnamant Kouba hag an drafikerion-dramm, a-zivout ar fuzuilhadegoù-tec'herion diehan, a-zivout an diwezhañ levrioù difennet, a-zivout rollad-prizioù ar *gineteras* (ur sandwich, ur pakad segalennoù), a-zivout efedusted aviadus ur Stad-polisour dezhañ un evezhier evit pep 28 annezad. A-hend-all e lenner bep sizhun mallozhioù d'ar sparlad armerzhel norzhamerikan, eñvorennoù hirvoudus eus Che Guevara, keleier eus prizioù, kargoù, gourc'hwelioù, enorioù deroet da lazherien war c'hourc'hemenn bet desket o micher ganto e Kouba.

Met kement-se holl n'eo "ket a-live". N'eo ket a-live gant ar pezh a vez gortozet gant Fidel, sparlad eo neuze. An trede poent a zispleg penaos e vo kaset da get ar sparlad-se.

Da drede : ret eo distrujañ frankiz ar stlenn "bourc'hiz" difennet gant an SIP (*Sociedade Interamericana de Imprensa*), evit lakaat da ren gwir frankiz ar stlenn, evel ma 'z eus anezhi dija e Kouba. Ya 'vat, frankiz-ar-stlenn a-vremañ e Brazil n'eo nemet frankiz "un nebeudig a dud a c'halloud". E Kouba nemetken e kaver ar frankiz wirion hag an haol³⁰-d'an-titouroù klok.

Anavezet eo mat penaos ez a en-dro ar frankiz-se ; displeget eo bet gant Cabrera Infante en e

³⁰ Haol : *droit*.

levr "Mea Cuba". Stadel an holl tiez-embann. Araok embann forzh petra e vefe e rank unan emezeliñ en ur sindikad, a dorr an aotre-skrivañ d'an disterañ disrann gant ar gelennadurezh politikel ofisiel. An ez-kazetenner a c'hall neuze klask ul labour all ; difennet eo avat reiñ labour da neb a zo bet argaset eus ur sindikad. Gallout a ra ivez goulenn sikour digant e vignoned ; diaes e vo dezho avat, peogwir eo difennet sikour un enebour d'ar Stad. Difennet eo ivez goulenn an aluzen, ha difennet muioc'h c'hoazh kuitaat Kouba. Ma teu a-benn neuze an haroz-se da dec'hout daoust da dennoù ar polis-mor ha da rinkined ar mor Kariban, marteze e kavo gourc'hwel en ur gelaouenn-koubaniz-harluet e Miami. Kement tra skrivet er c'helaouennoù-se a vo disgwiriet gant stlenn an holl vroioù (e Brazil muioc'h c'hoazh) evel "gevier euzhus ar mafia koubanat".

Setu peseurt frankiz-stlenn a vez c'hoantaet gant an 300 kazetenner o deus sinet diskleriadenn diwezhel an emvod.

War-lerc'h kement-se-holl, ma kav deoc'h c'hoazh e c'haller terriñ d'ar bondougoù komunour dre vriekadurioù, meuleudi pe aberzh kanmoedel³¹ un dehouiad bennak, soñjit er poent-mañ : n'eus mennad kreñvoc'h ebet eget hini "kemm ar bed". Penaos e c'hallfe unan a hunvre e galloud un hanter-zoue kaout e walc'h en ur gourc'hwel bennak ? Karg ebet, lubanerezh ebet, mignoniezh ebet ne c'hall dihentañ ar re a venn adstummañ an denelezh diouzh o skeudenn hag heñveliezh, e doare Doue.

Deoc'h da zibab, tudoù : pe e tennit kuit ar gomunouriezh eus pennoù an dud-se, pe e viot dibennet gant ar gomunouriezh. Ha me ivez, da heul, marteze.

Olavo de Carvalho

Lakaet e brezhoneg gant **Ewan Delanoy**, embannet evit ar wech kentañ e *O Globo*, dindan an titl *Cabeças*, niverenn ar 10 a viz Du 2001.

³¹ Kanmoedel : *solennel*.

Seizh pe eizh vloaz e oan

Da Geraskoed-Pluguen e talc'hemp da vont, daoust pegen pell e oa diouzh Brest. Eno e kejemp gant hor c'hendirvi a Bloveilh, seizh bugel va eontr Anton, ha re Zouarnenez ha Karanteg. Soñj mat am eus eus an Oferenn-Bred e iliz Pluguen, a oa neuze o tegemer tammig-ha-tammig an doare nevez, hini Vatikan II.

Soñj mat am eus da skouer eus ar beleg troet ouzh an Aoter e traoñ ar chantele. Hag eus ar merc'hed, niverus ar c'hoefoù en o zouez, ar re yaouankañ digoef gant o bugale. En tu kleiz e oant en iliz, hag en-dro d'ar chantele, hag a-dreñv ar wazed ivez, a oa en tu dehou eus an nev.

Va zad-kozh a oa un “Aotrou” e parrez Pluguen. Aotrou maner Keraskoed. E blas en devoa en iliz er renkoù kentañ a-zehou, kostez ar wazed, ha va zad a yae gantañ en e gichen. Ur wech e c’hoarvezas un darvoud a netra, hag a voe a-bouez bras evidon-me. Re a cholori a raen e-kichen va mamm (pevar bugel e oamp, hag un oferenn a zo hir-mat evit ur bugel...). Setu neuze, a-greiz pep kreiz, va zad kozh o vont en alez-vras, o kregiñ ennon hag o lakaat ac’hanon en e gichen e tu ar wazed. Hopala ! Tomm e oa bet din, rak aon am boa un tamm ouzh va zad-kozh, a seblante din bezañ un den kozh-tre, lunedoù ront evel gwechall, ur gravatenn voan, mourroù ‘vel Hitler - hogen louet evelato ! -, hag e di, ar maner, a oa ur savadur bras eston evidon, yen ha teñval, gant kalz a draoù difennet ouzhimp... Ouzh taol, grik ebet, gant ar vezh ! Hag atav ar memestra da zebriñ : vioù poazh-kalet ha kig-yar en un toaz treuzwelus heugus damm-galet, ha kaotigell kistin-Bourdel da echuiñ : earc’h !

Tomm e oa bet din hogen neuze e oa cheñchet an abadenn : ur *bromosion* vras e oa bezañ lakaet e tu a wazed ! Lorc’h a oa ennon, ken e oa, a c’hellit krediñ. Neuze en em lakaas an ilizad da ganañ ur c’hantik bennak e brezhoneg. Ne oa ket mouezhioù skiltr ar merc’hed ken eo a gleven, hogen mouezhioù izel ha kreñv ar wazed an hini e oa ! D’ar mare-se e oa leun an iliz e Pluguen evit an Oferenn-bred. Seblantout a reas din-me, paotr bihan seizh pe eizh

vloaz ma oan, edo gwerinier an iliz o krenañ. Marteze e raent, pa soñjer. N’eo ket se eo a fell din lavarout. En em gavet e oan, a greiz-holl, eus ar bobl-se, a-unan gant ar boblad-se a dud, o kanañ meuleudi da Zoue, laouen, va ene o tridal ennon, en ur yezh a blijje din kenañ daoust ma n’he c’homprenen ket. N’he c’homprenen ket, hogen daoust hag eñ ez eus un dra bennak da gompren pa vezer oc’h arvestiñ ouzh e Zoue ? Gant ar boblad-tud-se ne oan ket perzhiiek ennañ, tamm ebet, na dre ar yezh, na dre ar metou, e kanis gwellañ ma c’hellen kantikoù da Zoue. Soñj am eus pegen aketus e klasken lenn ar c’hantikoù brezhonek e oad o kanañ.

Diaes eo din displegañ petra a c’hoarvezas en deiz-se. Geneliezh va istor ez eo an darvoudig-se. Alies e teu din skeudenn an oferenn-se gant ar gwerinier o krenañ diwar mouezh kreñv ar wazed. Moarvat, gant an amzer (an dra a zo c’hoarvezet ouzhpenn 40 vloaz ‘zo) ez eo bet kaeraet an eñvoradenn ganin. Ne ra forzh. Pouezusoc’h eo pezh am eus buhez et get ar pezh a zo c’hoarvezet. Marteze a-walc’h n’eo ket c’hoarvezet tamm ebet evel-se. Marteze ez eo bet graet ar film-se en va fenn bloavezhioù war-lerc’h, diwar dastum “flashoù” eus an amzer gaer-se eus va yaouankiz, kaeraet, dreist-kaeraet, a dra sur. Ne ra forzh, a lavaran deoc’h. Graet eo ar film. Brav eo. Kaer. Va istor eo. Va istor o kregiñ. Seizh pe eizh vloaz e oan.

T. Gwilhmod

Ar Finvezioù Diwezhañ

Hiziv-an-deiz, krenn ha krak, n’eus mui anv eus katekiz ar palioù diwezhañ. Aon a zo da gomz a-dreuz. Anat eo avat ez eo kriz klevout seurt gwirionezioù. Neuze an Iliz a dav war ar penngoulennoù-se. Paz eus koulskoude kresk war an anken ha ma fell d’an dud bezañ kelaouet. Met pa chom peoc’h an dud-a-iliz, reoù all a sav o mouezh. Ganto ur yezh all avat evit displegañ planedenn mab-den.

Neuze, war un dachenn ken pouezus, n’ez eus nemet prezennoù koumoulek, gant aon bepred da spontañ. Hogen arabat koulskoude tevel war ar pezh a zo goude an douar-mañ, pa greder er goulo, en netra, er mann. E-giz pa ne vefe ket ar penngwirionezioù-se biroù-tan evit dihuniñ an holl. Evel-just, an embann-se ne zedenn ket engroeziou evel e marevezh Sant Visant Ferrer, ha koulskoude ar beleg ne zle ket kaout aon da goll e vrud. Rak n’emañ ket en e gefridi kelenn ur gravez dereat ez-kevredigezhel. Taolomp pled ! Chom hep gervel d’an evezh ar Gristenion war daraz ar “marv peurbadel” - anv all an ifern - a denn groñs d’an nann-skoazell d’un dudenn en arvar.

Ar Bibl, e levr Sirac’h Ar Fur hol lak groñs war ziwall : “E pep emzalc’h, bez soñj eus da zibenn”. Da lavarout eo eus koulz da varv, da lavarout eo eus pal da vuhez. Ar pal-se n’eo ket an toull-bez pe ar c’helanbulluc’her³². D’an ampoent, un toulladig Katoliked nemetken a gred, e gwirionez, en un dra bennak en tu all d’ar marv. Ha gwelet hoc’h eus penaos e tenner an huanadenn ziwezhañ ? Na beleg, na pedenn, nag eoul, na sakramant. Evel ur gantol o tivogediñ ha pik-arsav !

N’eo ket a-walc’h gouzout a belec’h e teuer evit bezañ eürus. Ret eo gouzout da belec’h ez eer. Gwashañ tra eo bageal, a-dreuz-gwel, e-giz ma teue-teu nemetken. Hiziv-an-deiz, e c’hortozomp pal hor buhez digant ar ouezoniezh, e harpomp hor buhez war an araokaat, he c’hrouadur, e-lec’h gortoz hor silvidigezh digant nerzhegezh an Awen C’hlan. N’eo ket ar vuhez ur pennad-c’hoari, met ur brokad³³, ur skod. Arabat krediñ ned eo hon oberoù na mat, na fall, ur ribotat-dour nemetken ; n’eus ket a heuliadur. Gant ma ne vo ket graet droug d’ar re all. Neuze n’eus mui nemet damantegezh ouzh kement emzalc’h

³² Kelanbulluc’her : *crématorium*.

³³ Brokad : *enjeu*.

'zo. A-walc'h eo menegiñ embregoù tud ar C'hornog hag a zo torr-krenn gant youl an Aotrou Doue : kenanvezh re yaouank, hilastalerezh, sioc'hanerezh, helazherezh, dimezioù adaozet, mammoù aralldougerezh, eginelloù skornet, diazalc'h trosezal³⁴. Ar yaouankizoù ne vez roet dezho nemet viruzennoù a varv, bemdez-Doue. Aes eo lakaat war-wel freuzioù ar gevredigezh kornogat gant ar gwariadurioù euzhus-se : ar gevredourion veziadek³⁵ int-i ivez a hop : "Harz d'an tan !". An devez danvezelour a aloub pep tra, dreist-holl finvezoù diwezhañ an den. Hag e vez faltaziet an Trehont dindan stummoù diaouled kornek, koumoul kotoñs frondus, eneoù o stlejañ chadennoù. An Ifern, ar Purdan, an Devarn diwezhañ n'int nemet nevedouriezhioù dispis, mojennoù, koñchennoù evit babiged.

Fidamdoue ! N'eo ket ur skeudenn ! N'eo ket kaoc'h ki du !

Pius XII a lavare o doa kalz pec'herion adkavet hent ar silvidigezh gant ar spouron dirak an ifern. Ya, zoken ar c'hourfedenn a asped : "Hon diframmit-ni diouzh an daonidigezh". Un dra all c'hoazh er pleustr, mar n'eus na Neñv, na purdan, nag ifern, na barnedigezh, na zasorc'h, na distro an Aotrou, na Gouezwel³⁶, perak dougen an arched d'an iliz, perak beleion tro-dro d'ar marv, perak an Hollsent, perak bleunioù er beredoù - e plastik alies - perak bezioù marmor ken koustus ?

Palioù ar vuhez denel a zo aet diwar-wel er prezegerezh hag er c'hatekizadur. N'eus ket ken a C'houbeizh³⁷ en ur bed-Doue, en ur Baradoz. Neuze e tremener gant an adenkorfadur³⁸ embannet gant

³⁴ Diazalc'h trosezal : *dépendance criminelle*.

³⁵ Kevredourion veziadek : *sociologues réalistes*

³⁶ Gouezwel : *parousie, retour du Christ*.

³⁷ Goubeizh : *espérance, en tant que vertu théologique*.

³⁸ Adenkorfadur : *réincarnation*.

falsprofeded diaoulek. Dirak ar goullou lezet gant an Iliz, kalz a zo darev da grediñ n'eus forzh petra, da glask ur vuhez all gwelloc'h. Hogen an Diskuliadur a warant dimp ez a hon oberoù d'hon heul. Ar pezh a dalvez e tremener d'ar bed all gant kement tra a zo ac'hanomp. Ha netra ouzhpenn !

Ha perak ec'h estlammfe Sant Paol : "Hen lavarout a ran deoc'h, breudeur, berr eo an amzer !" N'eus ket a astenn. Tamm ebet, hent an den hag an Istorvezh en deus ur pal peurglok : distro ar bed d'an Tad sturiet gant ar C'hrist Mab Doue, dre road evezhiek an Awen C'hlan. Ar Gwenvidig Newman, c'hoazh anglikan, a brezege : "Arabate ober gant ar bed-mañ hon annez. Klaskomp gwelloc'h bro, ur vro neñvel. Klaskomp an Hini a c'hell, Eñv nemetañ, hor blein davet ar vro-se. Hon heñcher, Jezuz an hini eo."

Neuze, kredomp ervat ned eo ket ar gwirionezioù-se spontailhoù nemetken. Hogen bez' ez int gwirionezioù tenerded Doue diskleriet gant Jezuz a Nazared. Ouzhpenn-se, emañ ar Werc'hez aze, peuraketus betek an eilenn ziwezhañ, evit silvidigezh he bugale. Setu perak Jakov ha Vicka daou welour eus Medjugorje o deus gwelet tan, kasoni, euzh an ifern ha klevet eneoù e poan, war ribl penn an hent da vont d'an Neñv. Erfin he deus Mari kroget en o dorn d'o c'has d'ar baradoz. E Fatima, e oa gwelet gant an tri fastor eneoù ar re zaonet o kouezhañ en ifern evel delioù marv d'an diskar-amzer. Ya, an Doue Bev a c'hell stokañ ouzh kaledadur an droug, ouzh ar gendalc'husted er fallober. Neuze arabate ober goap ouzh ar C'hrouer ! Ar C'hrist a gomz dalc'hmat eus an droug evit hon distreiñ diwarnañ hag e prezeg dalc'hmat war ar mad evit hor broudañ dezhañ. Evelato ez eus ur gwirvoud nemetañ. Ar Gendruerz Douevel a zo kalon an Drielezh

Youenn Troal

Keleier berr

Langoad : (tost da Landreger), bep eil sadorn eus ar miz da 17 eur ez eus un **oferenn vrezhonek**.

Brest Sant Varzhin – An **Oferenn en he stumm dreist-ordinal** a vez lidet hiviziken e iliz-parrez sant Varzhin da 10 eur 30.

Breizh – D'ar gwener 17 a viz Kerzu e voe taget kantadoù a lec'hiennoù eus an **Deskadurezh katolik e Breizh** war ar genrouedad gant "**1923Turk-grup**". E 1923 an hini e voe savet ar Republik a vremañ e Turkia, ur republik « laik » a zeuas a-benn abaoe da zigreskiñ niver ar gristenien war he ziriad a 98 % : ne chom nemet 3000 e Turkia penn-da-benn.

Brest : war « Ouest-France » ar 7 a viz C'hwevrer e klemm an UDB dre maz eo bet divizet serriñ

« **Planning Familial** » Kerigonan-Brest, hogen ur gwazadur all a vo digoret e Lesneven. Kaoz ez eus ivez eus ar gwazadur a zo en ospital Morvan. Diwar lenn ar pennad e ouezer e teu ar maouezed daveti, evit abegoù a hilastalerezh dreist holl (1800). Klask a reont muioc'h-mui ober gant doareoù-hilastaliñ « nevez »³⁹ : emplantennoù, patchoù, gwalennoù-forzh, disperieroù hormonel...

3218 gweladenn a zo bet en Ospital Morvan e 2010. 978 minorez a oa en o zouez.. **600 a diforc'h-bugale a zo bet en ospital Morvan**. War goazhañ ez a niver ar sioc'hanadurioù emezeur dimp, met n'eo ket ur sifr dister ! 360 dre surjianerezh, 240 dre bilulennnoù. Evit ar sioc'hanañ surjianek o deus divizet ar

³⁹ Marteze dre ma klevet muioc'h-mui e vefe ul liamm etre ar bilulenn-hilastaliñ ha krign-bev ar vronn ?

surjianed lakaat ar maouezed da gousket « aesoc’h eo », emezo, « evit abegoù bredel ivez ». 1100 skolajiad pe lisead a zo bet « kelaouet » gant Planning Familal an Ospital Morvan e 2010.

Brussel – Deiziataer Unvaniezh Europa a verke gouelioù an holl relijionoù nemet unan : hini an darn vras eus Europiz, ar relijion gristen. En em ledañ a ra dalc’hmat, tammig -ha- tammig, ar **Gristengaserezh**⁴⁰ er gevredigezh.

Pakistan : kendaonet eo bet d’ar boan a varv dre grougañ ur bakistanadez gristen, Asia Bibi, mamm a diegezh, gant lez-varn Sheikhpura, er Penjab, war zigarez barrletad⁴¹. Nac’het e oa bet gant ar maouezed a laboure ganti er parkeier evañ an dour bet degaset evito gant Asia, dic’hlan e vije bet an dour dre e vije bet stoket outañ gant ur gristenez. Ar maouezed-se o defe klasket kendrec’hiñ Asia d’he c’hanttreiñ ouzh an Islam, pezh he defe nac’het groñs en ur geñveriañ Jezuz ha Mohamed, pezh a vefe ur barrletad hervez lezenn Pakistan. Emañ er prizon abaoe 2009 en ur c’hortoz adwel he frosez gant lez-varn Lahore. Mard eo didamallet, ne vo ket salvet da vat evit-se : bez’ e lavar an dud en he c’hêriadenn e vo lazhet ganto. Daou bakistanat kristen all, tamallet ivez evit barrletad a-enep Mohamed, didamallet gant al lez-varn d’an 19 a viz Gouhere 2010 a voe drouklazhet gant an dud e-kreiz sal al lez-varn. Drouklazhet eo bet ivez, e miz Here 2010, Mohammad Farooq Khan, un dremm anavezet eus an Islam pakistanat : stourm a rae evit ma vefe torret al lezenn evit barrletad. An Islam relijion a beoc’h ! Dibikouzomp hon daoulagad ! Enlusket eo bet tudennoù brudet evel Carla Bruni-Sarkozy, Bernard Henri Levy, Bernard Kouchner... evit difenn Sakineh Ashtiani, ur vuslimadez, kendaonet en Iran evit avoultriezh ; evit ar gristenez Asia Bibi, ne weler ket an tudennoù brudet-se ober kement-all.

Penn-ar-bed – E-barzh Ouest-France ar 16 a viz Kerzu e lenner ur pennad diwar-benn stad ar frankvasonerezh a zo o kreskiñ e Penn-ar-bed. 900 frañmason bennak a vefe bremañ !

Plonevez-Porzhe – d’an 19 a viz Gwengolo e oa bet ur vodadeg vras war tevenn santel Santez Anna Ar Palud. Leun a dud, 2000, a oa deuet da vanifestiñ a-enep ar « bezhin glas ». Un aergelc’h « gouel » hag « a-beoc’h » a veze prometet gant aozerien an devezh-se, en o zouez « Dourioù ha stêrioù Breizh », anavezet mat. Ar Sul e oa. Deiz an Aotrou eo ar Sul. Galvet e oa bet ar gazetennerien ha kroget e oa bet gant un oferenn. Neuze e voe unan war an ton bras, gant un eskob mar plij. André Ollivro en doa gwisket ur gazul hag un tog-eskob. Digredus. Daoust hag-eñ o defe an amvevadourien adkavet ar feiz, a-benn ar fin ? Tamm ebet ! N’emaoc’h ket ganti ! André

⁴⁰ Kristengaserezh : *christianophobia*.

⁴¹ Barrletad : *blasphème*.

Ollivro n’eo nag eskob na beleg. Evit ar fent e oa. Ne gavit ket fentus ? Paour kaezh ! Pa lavarar deoc’h e oa dinoaz ar c’hoari-se en o spered ! Evit gwir n’o deus graet nemet profitañ war ar gwir ez eus e Frañs d’ober goap ouzh ar relijion gristen. Ne rafent ket se gant an Islam, nann. **Kristenc’hoapaerezh** eo.

Ploermael – War an Télégramme eus ar 7 a viz Genver e klever anv eus **Pierrick Le Guennec**, a gomz evel sekretour al **Libre Pensée** da heul ar prosez bet gounezet ganti a-enep **delwenn Yann-Baol II** Ploermael. Anavezet mat eo an den : bet eo bet war ar renk en dilennadegoù e Lanester evit ar strollad trotskour **Parti des Travailleurs** e 2005, met anavezet e oa a-raok, dreist-holl abaoe **gwalldaol Kever**, evit e obererezh-diaoulekaat a-enep d’an Emsav broadelour hag a-enep da emsav ar brezhoneg zoken⁴². Bremañ e ouzomp eta ez eo kouezhet an devod-se eus Republik-an-droc’herien-pennoù, hollvedel he dreistelevh, dilavarus he jakobinelevh, en ur stad izeloc’h eget bezañ ur mac’her eus al liesseurtiezh er C’hwec’hkogn-santel-meurbed, kavell Diskleriadur Gwirioù Mab-Den : deuet eo da vezañ ouzhpenn-se un debrer beleien marnaoniet, hag amañ un diskarer delwennoù santel, evel da vare an Dispac’h Gall. E keit ha ma vez klasket diskar e zelwenn e Breizh ez embann an Iliz emañ **Yann-Baol II** da gontañ e-barzh roll hir an Dud Wenvidik a zo er Baradoz en-dro da dron Doue. Gouez da **Joseph Kergueris**, kadoriad kuzul-meur ar Morbihan ez eo al « Libre pensée » en afer-se nemet « *ur vandennad laïkourien flirbich ha c’hwerbous*⁴³ » na dalvez ket ar boan ober re a stad outo. Nann ‘vat, met petra ‘ri ? Leuskel anezho da genderc’hel d’ober freuz ha reuz war-lerc’h kement tra brezhon ha kristen a zo er vro ? Da heul an Drec’hadenn Veurmañ a-enep d’ar Galotined emañ Pêrig hag e « Libre Pensée » o vont da glask laou e penn Dilennidi ar rannbarzh e Roazhon evit ar skoaziad a roont da aozerien « **Gouel Erwan** ». Nag ur vezh e bro... sant Erwan !

Gwened - War Ouest France ar 15 a viz Kerzu 2010 e lennomp en deus douget klemm an Aotrou Bimbochet nevez, **Pierrick Le Guennec** adarre, bepred en anv “**La Libre Pensée**”, a-enep da zoareoù ar gomun a glask aesaat savidigezh **ur voskeenn vras** e Gwened, doareoù a yafe, gouez dezhañ hag adarre, “*a-enep da lezenn 1905*”. Ar Vuzulmaned n’o deus ket re a viloù da gaout, rak en taol-mañ, an holl bolitikerien eus an UM-PS hag o mignoned ar sodion-util eus an UDB, an holl re-se a zo a-du krenn gant islamegudur Breizh.

⁴² Er *Wikipedia* brezhonek e lenner e sav teuliadoù war boent pe boent eus istor politikel an emsav, diwar-benn tud 'zo (Roparz Hemon...), aozadurioù (Diwan...) pe traoù dibar (Gwenn-ha-Du, Bro gozh ma zadoù...). Tennañ a ra tammou frazennoù tapet amañ hag ahont e-barzh kelaouennoù hag o lakaat a ra kichen-ha-kichen, dindan frazennoù pe titloù savet gantañ. Netra nevez.

⁴³ « *une bande de laïcards agités et sectaires* »

Loudieg – d’ar 27 a viz du 2010 en doa kensinet **Marc Le Fur**, kannad UMP ar c’hornad, ur ginnigadenn-lezenn diwar-benn **ar c’hig “halal”**. Tri devezh war-lerc’h hepken e vo tennet kuit ar ginnigadenn-lezenn-se war urzh **Jean-François Coppé**, penn-rener an UMP ! Kompren a reer diwar-se n’eus ket ar gwir da lezenniñ war seurt sujedoù pa n’int ket *politically correct*. Mat eo gouzout ez eus war-dro 40 % eus kig lazhtioù Frañs a vefe “halal”, da lavarout eo, “*goude ur bedenn graet gant ur Muzulmad e vez troet penn al loen war-zu Mekka, hag, hep e fatañ, e tigor e c’houzoug d’e ziwadañ betek ma varvo*”. Ur marv kriz eta, a zegas ouzhpenn-se leun a wenneien d’ar moskeennoù⁴⁴. Evit ur c’hristen, daoust hag eñ ez eus aotre da zebriñ seurt kig ? **Sant Paol** a lavar e c’heller debriñ ar c’hig a vez kinniget d’an idoloù dre ma n’eus ket eus an idoloù ha dre ma ne gemm ket doare ar c’hig e-unan gant seurt lidoù (1 Kor. 8,4). Daoust da se e lavar pelloc’h ez eo arabat henn ober pa ‘z eus ur riskl ma vefe treuzkomprenet ar jestr gant kristenien all, gwanoc’h o c’hompreneson eus ar feiz, rak neuze, dre hor faot “*e vefent douget da zebriñ eus ar c’hig gouestlet d’an idoloù*” hag “*e vo kollet dre da ouiziegezh an den sempl, ar breur-se ez eo marvet ar C’hris evitañ*” (1 Kor 8, 10-11). Pelloc’h e lavar ivez (1 Kor. 10, 25-28) : “*Debrit eus a gement tra a werzher er marc’had hep ober goulenn ebet dre vorc’hed a goustiañs. D’an Aotrou eo an douar ha kement a leugn anezhañ. Mar bezit pedet gant un den difeiz bennak ha ma kavit mat mont, debrit eus a gement tra a vo lakaet dirazoc’h, hep ober goulenn ebet dre vorc’hed a goustiañs. Met mar bez unan bennak o lavarout deoc’h : Kement-mañ a zo kig aberzhet d’an idoloù, na zebrit ket neuze, abalamour d’an hini en deus roet an ali se deoc’h, hag en abeg d’ar morc’hed a goustiañs*”. Pa vez anv eus kig halal, e vez roet deomp da anaout, e vez lavaret deomp, ez eo kig aberzhet da Zoue faos **Mahomet**, d’un idolenn eta. Gwashoc’h ‘zo : prenañ ha debriñ

⁴⁴ Etre dek ha pemzek kantim ar c’hilo, hervez Kamel Kabtane, rener moskeenn vras Lyon.

kig halal e Frañs a zo *kenoberiañ gant hon arc’hant* da astenn an idolouriezh-se en abeg d’an arc’hant degaset d’ar moskeennoù gant al lazhtioù. Gwelloc’h chom hep ober eta, pa c’heller...

Pariz – 15 a viz Genver. **Marine Le Pen** en em gavas e penn ar « *Front National* ». Diskleriañ a reas **Louis Aliot**, he c’henlabourer tostañ, ez eo-eñ katolik, met ne ra ket dave d’an dra-se en e stourm politikel : « *Klask ober din goulenn traoù a rafe dave ouzh ur gumuniezh, ouzh ur relijion pe ouzh un tolead, n’on ket a-du gant-se*⁴⁵ ». Gant an diskleriadenn-mañ e tistaol groñs ar F.N. an dave d’ar relijion gristen, pezh a zo nevez. Derc’hel a ra ivez dalc’hmat d’ar bennaenn jakobinat, rak gant ‘*dave ebet ouzh an tolead*’ e kompren n’int ket evit anavezout, e doare ebet, gwirioù ar Vrezhoned hag ar re all. Kement-se n’eo ket nevez met disteurel a ra, krenn, un tuadur rannvroelour bennak a gaver er metou-se, ur spered proviñsialist, gwelwelour, a gave dezhañ e oa tu da adsevel Frañs en ur zerc’hel gwelloc’h kont eus an identelezhioù-rannvro, un tammig spered **Pétain**, ar vammvro vihan, pe hini **de Gaulle** hag e boblvouezhiadeg rannvroelour e 1969. Distaolet gantañ “temptadur” ar gatoliked hengounelour hag hini ar rannvroelourien eta, ec’h adskoulm ar F.N. gant **idolenn an Nasion**, ur skeudennadur disgwiziennet ha difetis, mat da lorbiñ an Engroez.

Trugarez vras d’ar re o deus kaset o skodenn evit 2011. D’ar re all n’eo ket re ziwezhat he c’has... ha da genskrivañ p’hoc’h eus tro. Roit Kannadig Imbourc’h da lenn en-dro deoc’h, da gavout lennerion ouzhpenn d’ar gelaouenn : goulennit skouerennoù all m’hoc’h eus ezhomm hag e vo kaset deoc’h evit ar bruderezh.

⁴⁵ “*Je suis catholique mais je garde ça pour moi. Je connais des musulmans et des juifs. Mais essayer de faire des revendications sur la base de sa communauté, de sa religion ou de sa territorialité, je ne suis pas d'accord*”.

Mererezh

13 € eo ar skodenn emezellañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc’h* (16€ er-maez ar C’hwec’hkogn). Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc’h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n’int ket c’hoazh diviet a c’heller kaout o skrivañ pe war : <http://pagesperso-orange.fr/kannadig/> (*Notit eo bet kemmet chomlec’h lec’hienn EAT-IMBOURC’H*)

Skridaozerezh

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr , pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc’h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moullet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù**. Kergreven - 29800 Trelevenez - ISSN : 1144 357X